

# Potr ar mik ha Potr ar laez

Evit an déou tremenet  
A zo zavet on disput  
An tre daou den zo istimet  
A gredan gant kalz a dud  
Gant Guillermic potr ar mik rouz  
Demeuz a vourg Landujen  
Hac Youan an ever laez douz  
Deuz a Gerlipiojen  
Deuz anetach alkoholizet  
Heman na neva taken

On devez benak potr a laez  
A rencontraz Guillermik  
Azcet in kichen y dan  
O hevan banac'ho mik  
Or voutaillad rhum pe gognac  
A wa in tal y gichen  
Ac a deuc pep daou vunut  
Da hat kargo y weren  
Evel dre korzen or pompercin  
Tremenink ni gorzaillen

Ewar zin farzal Youanik  
A lavaraz dan Justu  
Mar dihanet ket deus an mik  
Houi a zo on den foutu  
Pervuan an davernourez  
Neuz tapet or goaz mevier  
Zo zur da veza intanvez  
Goal abred deuz y amzer  
A surtout mar chom ar pratik  
Devesat, y vreg ar gaer

Evel hini ar general  
Guillerm a drouchaj y dok  
Ac a respontaz fuloret  
Dy Youanik gant on aer rock  
Me chencho kalz opin'on  
Mar konsentan dont biken  
Da c'houlen konsultation  
Digant or liper koaven  
Neuz hoant gant y veg minaoet  
Dont da chifoqui an den

A garfe gant y hinou vlour  
Dre ma he hanter grevet  
Goelet ar real hevad dour  
Evit tori ho zehet  
Bepret vo begou lardet  
Hac a renko sourceial  
Demeuz komportamant yehet  
Ha deuz groage a real  
Balamour na nenket o hun  
Evit ober evel an dudal

## Potr ar laez

Diez kavan na nahanket  
Goelet on den a skiant  
Evel doc'houi abrutisset  
Dre vorz evan gwinnardant  
Ho kof evel or variken  
Deja a zo aru sten  
O fri pufet a kulotet  
Zo ru evel or gelezen  
Hac o pen a zo deut houeyet  
Haaver deuz or citrouillen

## Potr ar mik

Evidon me in gwirione  
Na gavanket goal diez  
Goelet hanoc'h evel or loe  
O c'hevan korvado laez  
Gallet mije bet kouskoude  
Lavaret dre ma rezon  
Hep aon vije deut kalz a dud  
Da zislaret a c'hanon  
On den pemp bloa ha triugent  
Zo aru poent in dizon

## Potr ar laez

Na neket an or rotal  
A lakiet Guillermik  
Ar laez douz pur da vezan val  
Nac avo goeloc'h ar mik  
Diwar ar laez meuset goelet  
An dud kol o zantimant  
Gant a dud zo rivinet  
Dre effet ar gwinnardant  
Hoas reont poan speret do zud  
Goude dispign ho arc'hant

## Potr ar mik

Ar mik meuz laket im c'hreden  
Digassa nerz dar botret  
Klevet meuz ive lavaret  
Tigass bruchet dar merc'het  
Merc'het goejal gant iod a laez  
Vije plad. losk a ledan  
Bremen nor goeler chik a mouth  
Graciuz ha korved moan  
Merzeriou ye ha dentelez  
Ave war c'heure ha dindan

## Potr ar laez

Kouskoude veler ar merc'het  
Aboue ma bet ar brezal braz  
Evit tenti kaeroc'h ar botret  
Vont da valle hanter noaz  
Ar c'hoef neket ken istimet  
An demezel zo in toc  
Troc'het y bleo evel ar botret  
Hanvel demezel or gilgoc  
Prestik avo stard anavout  
Ar boleuz demezel ar c'hocq

Or vroz ver or laerou zei fin  
Evit monet dar jaz banden  
Izeloc'h evit pen an daou glin  
Naleket ar vroz disken  
A hardi bec'h da dabouline  
Trouz ar goz votez a skloc  
Deuz ar c'homanch betag ar fin  
Rac a dac a dac a klic kloc kloc  
Kof deuz kof mesket daou glin  
Rodal war drem ha war rog

*Potr ar mik*

Lakat a ret o speret izel  
Nor donet da zonjal  
Na gleket merc'het Breiz-Izel  
Bezan evel a lec'h all  
Ac evit heuil yez o mamou  
Ar renk fent dougen bepret  
War o chouk pejou tapissou  
Mad da c'holoñ kezec  
Ha brojou hir evit skubat  
Ar ru d'o c'hitronezet

Ar merc'het youank zo breman  
Na nent ket mar ma c'hædet  
In poan da c'hout in pez veçon  
A garfec'h a vent guisket  
An de plijo d'hon merc'hejou  
Adage ewar o c'hiz  
Dont da c'hirat c'hoaz o brojou  
Pe da c'hirat o c'hiviz  
Gredanket a vo c'hret kavet  
Gant potr ar laez y aviz

*Potr ar laez*

Evit kavet or speret uvel  
Herve da gont he gleet  
Disprijout on bro Breiz-Izel  
An enor dar C'hallaouet  
A lec'h or c'houeñ dantelezet  
On merc'het a renk dougen  
Or galepoussen val daesset  
Poset war koste ho venn  
On tom-pouss ac or zac'h ridet  
A war o chouk kroc'hen or loen

Prestig memez ar brezonnect  
Na yoket komzet ir vro  
Troho ra ar baysantet  
Gallec bras leiz o genno  
On oll yezou kaer dilezet  
Kemet se a gavan stard  
Goulet or penn zon brezonnect  
On devez gant ian ganfard  
Respono d'ach monte là-dessus  
*Et tu verras Montmartre*

*Potr ar mik*

Nem gavet a ran zouezet  
Deuz da glevet Youan gaez  
Arru e poner da speret  
Dre ma hevez re a laez  
Kalz evel d'out nije karret  
Miret hed an oil amzer  
An diskadurez ac ar gallec  
Evit magadenou kaer  
Ra poan d'e gouelet ou merc'het  
Demeuz o re komer skouer

Fent nive on den klevet  
Autrone in liviten  
O lavaret d'ar baysantet  
Ave re hir ho chupen  
Mez drouk a mad gant o vrio  
Dre ar liberte a rein  
Ar labourer avo disket  
Ha guisket evel pomb den  
A droet a meuz da gomz gallec  
Koulz evel ar voure'lijen

Kaer avo konto pemp ha nao  
Hac a deou hac a glei  
Gant on toulat koz fiabenno  
Harz feket ar bed da drei  
An dour a c'hei bepred war draou  
Hac ar tan a c'hei war grec'h  
Da nem unani d'ou daou  
An dud yaouank e rei bec'h  
Dober konverz ar poupenaou  
Hidu ar c'hoaz evel dec'h